


# Spisverkoù an 3vet



## 1914-1918: ar Brezel-bed Kentañ

Brezel en Europa da gentañ hag àr-lerc'h er bed etre an Emglev Tridoupl( Frañs hag he c'hevredidi) hag an Aliañs dridoupl(Alamagn hag he c'hevredidi).

Trec'he voe an Emglev tridoupl. Kas a ra 9,5 milion a dud marv, 21 milion a dud c'hlozet « genoù torret »

## 1940-1944: ar renad Vichy

Goude an droukziwezh e 1940 e voe savet ar renad Vichy renet get ar Marichal Petain hag e kenlabour get an IIIvet Reich.

## 1944-1945: dieubidigezh Frañs

Dieubet eo Frañs get ar gevredidi hag ar resistañted. Adsavet eo ar Republik(IVvet Republik) hag emañ roet ar gwir votiñ d'ar vauouezed.

## 1958-1968:ar blezadòù De Gaulle

E 1958 e ta ar jeneral Charles de Gaulle e penn ar stad c'hall. Siniñ a ra an arsav-brezel get Aljeria hag a sav ur Republik nevez e-lec'h e ta da vout Prezidant(Vvet Republik).

## 1981-1995: ar blezadòù Mitterrand

E 1981 e ta François Mitterrand da vout Prezidant ar Republik an tu Kleiz(sosialisted).


## 1995-2007: ar blezadòù Chirac

E 1995 e ta Jacques Chirac da vout Prezidant ar Republik.

1900

1950

2000



## 1924-1953:Stalin e-penn ar galloud

Ren a ra Stalin àr URSS hag e tiazee ur renad totalitaerel

## 1933-1945: Hitler e-penn Alamagn

E 1933 e ta Hitler da vout kañseller hag e stalia tamm-ha-tamm un diktaturiezh nazi( enepsemitagezh, gouennelouriezh...)

## 1939-1945: an Eil Brezel-bed

Goude bout aloubet Polonia e krog ar brezel-bed.Padout a ra 4 blez hag ez eus 60 milion a dud marv, brezel lazhusañ an Istor

## 1947-1962: an didrevadenniñ

Dont a ra an trevadennoù europat lec'hiet en Azia hag en Afrika dizalc'h dre emglevioù pe get feulster.

## 1961-1989: moger Berlin

Etre an daou zeiziad emañ savet moger Berlin hag a droc'h Berlin etre an tu kornôgel (SUA) hag an tu reterel(URSS). Arouez ar brezel yen hag a zisparti ar bed etre an Daou Vras (SUA-URSS).

| N  | Deiziad                | Darvoud  | Perak?   |
|----|------------------------|--|--|
| 1  | <b>1916</b>            | <b>Verdun</b>  | E 1916 e klask an arme alaman toullañ an talbenn c'hall e Verdun; kas a ra miliadoù a dud marv.  |
| 2  | <b>1917</b>            | <b>Dispac'hoù e Rusia</b>  | Dispac'hoù e Rusia get ar Volcheviked renet get Lenin e 1917   |
| 3  | <b>11 aviz Du 1918</b> | <b>Arsav-brezel pevarzek</b>   | Sinet eo an arsav-brezel e Rethondes e-tal Pariz evit lakaat termen emgannoù ar Brezel Pevarzek.<br>Trec'het eo Alamagn hag he c'hevredidi.  |
| 4  | <b>1936</b>            | <b>Trec'h Talbenn ar Bobl</b>  | E 1936 en em stroll ar strolladoù politikel kleiz e Frañ evit stummiñ ur gouarnamant nevez : Talbenn ar Bobl et Leon Blum e penn . Votañ a ra reformoù sokial( sizhuniad 40 euriad labour, div sizhuniad ehan-labour gopret).  |
| 5  | <b>1945</b>            | <b>8 a viz Mae : achumant an Eil Brezel-bed</b><br><b>Eost 1945: Bombezennoù Hirishima ha Nagasaki</b> | Kapituliñ a ra Alamagn, achumant ar brezel en Europa.<br><br>A-benn lakaat da blegiñ an impalaeriezh Japan hag a nac'h arestiñ an emgannoù er Meurvor Habask e tiviz SUA renet get H. Truman baniñ div vombezenn àr Hirishima ha Nagasaki : kapituliñ a ra doc'htu ar Japan.<br>Achu eo An Eil Brezel-bed. |
| 6  | <b>1957</b>            | <b>Feur-Emglev Roma</b>  | E 1957, 6 Stad (Belgia, Luksemburg, Frañs, Izel-Vroioù, Italia hag Alamagn(RFA) a sin aan emglev evit krouiñ ur marc'had boutin: kroget eo saverezh europat.   |
| 7  | <b>1958</b>            | <b>Saverezh ar Vvet Republik</b>   | E 1958 e sav ar jeneral De Gaulle ar Vvet Republik hag e ta da vout Prezidant ar Republik dilennet dre voueziadeg hollek.  |
| 8  | <b>1992</b>            | <b>Feur-Emglev Maastricht</b>  | Siniñ a ra frañs hag ar stadoù europat un emglev evit donaat saverezh europat é tigiñ ar bevennoù(egor Schengen) hag é krouiñ ur c'heodedouriezh europat(keodedad europat).  |
| 9  | <b>2002</b>            | <b>Euro, moneiz en U-E</b>   | Krouidigezh an Euro , asantet get 15 Stad , moneiz nemetañ implijet .  |
| 10 | <b>1941</b>            | <b>Bro Naoned</b>  | Bro an Naoned distaget doc'h Breizh get ar gouarnamant Vichy   |
| 11 | <b>1977</b>            | <b>Diwan</b>   | Skol Diwan kentañ krouet e Lambaol-Gwitalmeze.   |